

154

KIMMIAD ETRE DAOU ZEN YAOUANC.

Occupi a ran va speret eun nebeudic amzer,
O tont da rima eur chanson ha d'he expliqua selter,
Var sujet daou zen yaouanc hac en em garie parfet
Aboue ho bugaleach e voant oc'h en em zarempret.

Dont a reont ho daou da formi eur bromesse,
N'eus fors peira e glevjet an eil eus eguille,
Da veza victorius var ho ennemiet
Hep caoz na concluzion da denna d'ar billet,

Mes siouaz ! hennes zo bet ho ennemi mortel,
Digouet eo bet gantan eun numero izel ;
Pevar var nuguent en deuz, souldard en assurance,
Ober a rei eur c'honje e trouplou roue a Franç.

Cetu ar femellen en desolation,
Glac'harot hac annuiet he rannet e c'halon ;
Gant ar c'heuz d'he zervicher ec'h annonç ar c'helou,
Hac e clever ober cont euz an numero.

Ar zul araog ma parti an den yaouanc,
Eun devez goude e lein da di e vestres coant,
Ha trist evel ar maro, o tont d'he zaludi,
Ranna a ra ho c'halon o tont da zepari.

— De bonjour deoc'h va mestres ar muia caret,
Ar zonch em boa e vijemp er bed-mâ unisset,
Abalamour da Zoue, roit consolation
Da eur galon languissant amarret er prizon.

— Dont a rafen d'ho consoli, émezi, va mignon quer,
Hac e za va oll vad d'oll lemel euz ar viser ;
N'oun quiet evit ho rançoni demeus a guement-se
Ret eo oboissa pa gommand ar roue.

— Aça eta, va mestres, avis e c'houlennan,
Da c'houde penaos da ober quen evit partian ;
Quent evit partial e preafec'h eur voalen,
Evit rei d'in e secret hep na ouife den.

— Ar c'haera hac ar guella euz va mouchouerou
A roin-me deoc'h, den yaouanc, da vont er mes ho pro ;
Pa ho pezo eur momet amzer evit dont da zellet,
E teuo deoc'h da zonj euz ho muia caret,

— Varc'haoz, da zec heur hanter, me a erruo ama,
Hac etre diou ha teir heur e ranquin partia,
Da vid eur mouchouer e poa din prometet,
Da zigas deoc'h ar voalen em boa deoc'h promete

Cre a vije ar galon an hini na ouelje,
O velet an daou zen yaouanc d'al lun araog creis de ;
An hini a vele anezo oc'h ober ho c'himiad,
Straca a re ho c'halon o tont de em guitad.

— Ia, me a voa bet maguet gant va mam ha va zad.
O tont d'ho diouëret, em beus bet calounad ;
Mes non pas evel houman, va mestrezic fidel,
Ma na deuit d'am c'honsoli, me a zo prest da vervel.

— Hac e cafen mab eur prinç evel ne gavin quiet,
Biquen da zen ne vezin dèmezet ;
Biquen va guer da zen na roin da zemezi,
Quen na vezit arruet evit va eureuji.

Ober a rin va c'honje hep beza enouet,
Mar bezit fidel d'ar pes a brometet ;
Hep scriva d'ar ressort da droubli hor chaden,
E vezomp unisset ma retornan biquen.

En instant ha ma pösin, me scrivo eul lizer,
Da zigas, d'ho consoli, va mignounezic quer :
C'houi ho pezo ar vadelez da zont d'he denna,
Ha da laquât lenn secret ar pez a vezo varna.

— Gant cals a blijadur hag a gontantaumant,
Pa glevin e vezo arru, me ielo en eun instant,
Ha laquât lenn secret ar pez a vezo varnezan,
Ha da gas deoc'h respont, mar goulennit outan.

Anhini en deuz great ar zon-mâ ne quiet c'hoas savant,
Oajet eo a bevarzec mis en tu all a bevar c'hant,
Hanvet Guillom ar Guyader, dre ar scrïd e ped sin,
A zo ganet ha maguet e quer Plestin ,
Hac en dens he c'huited evit en em avanç,
Ha brema ez e residant eur guer a Recouvrans,

FIN.

Chanson an Diaoul Arc'hantet.

Da viret na stacac'h ho calon
Re oc'h an arc'hant, Bretonnet,
Clévit eur chanson composet,
Troet a c'hattec e Brezonnec,
Grêt var sujet eul loen arc'hantet
Deguiset e form an drouc-speret
Hac o sonjal attrap an arc'hant,
Nombr a dud a yeas da redeg.

Bez e oa eus a bep seurt micher
Hag euz a bep condition
O redec an Diaoul arc'hantet,
Ma vennent terri a c'halon,
A bep etad, nobl a partald,
Bourc'hisien, paysantel ha a bep stad,
Hac ezech'h, graguez ha plac'het,
A rede da glasq e attrap,

Ur chirugien, un apotiquæ,
Ur medecin, un avocat,
Un noter hac eur procureur,
D'e redeg a daot o dillad,
Hac ur greffier hac un hucher,
Ur serjant, ur recor hac un archer
A yea varlec'h an Diaoul arc'hantet,
Ur pifrer hac un tambouriner.

Ur grossier, ur mercer, ur c'haner
A abandonnas ho boutiquou,
Evit sonjal attrap an arc'hant,
Da vont da redeg dre ar ruyou ;
Ur c'hontreporter, ur c'hincailler ;
Ur sculpter, ur broder hac ur pinter
A voe varlerc'h an Diaoul arc'hantet
Dre guemant corn a voa en qêr.

Ur marc'hadour lien hag un drapier,
Ur c'halvez hac ur munuzer,
Ur poder sten hac un ofreber,
Ur c'hoataer hac ur chodronier,
Ur fourbisser hac ur guiader,
Ur brider, un diber hac ur barbier
A red, o sonjal e drouc'ha,
Emezan, gant e razouer.

Ur marechal hac ur labourer,
Ur tosser hac un armurier,
Eur c'hiviger hac ur boutaouer,
Hac ur piquer hac un toer,
Ur piquer-men hac un tacher,
Ur marc'hadour a bep seurt liqer,
Ur martolot hac ur maltoultier,
A yê var e lerc'h ur c'hoarier.

Ur frippier hac ur frippieres,
Ur varc'hadoures a besquet,
Ur marc'hadour soa, ur goulaouyer,
A yas oll dre guêr o redec.
Ur laonvier hag ur c'honteller,
Ur operatour hac ur mestr danser
Ur filouter neud eo ar goassa,
Oc'h e redec partout dre guêr.

Ur jardiner hac ur maçonner,
Ha marc'hadour a bodou pri,
Ar boulanger mar guell e attrap,
El laquay er forn da zévi,
Ur c'hereour, ur c'hemener,
Ur pastessier hac un traier,
A red varlerc'h e clasq e hacha.
E ziouesquel a zo lijer.

Ur varc'hadourez a oranjes,
Prun, resin hag a figues,
Hac un all a verze avalou,
Hac un all a verze crampeoz,
Ur c'honfiturier, ur sucrier,
Ur perruquenner hac un oublier,
Ur miliner mar guell e disout,
A lavar a rei e valeur.

Ur boneder hac ive ur gorer,
Hac ur lemmer ar c'hontellou,
An ini a ampoeson ar razet,
A rincer ar chiminalou,
Marc'hadour an allumetez
A rede dre ar foul evit nep pres,
Gant un eteo tan hac ur paqad,
O sonjal dévi e vraguez.

Ur c'higer hac ive un tavernier,
Ur pesqetaer, ur passager,
Ur paperer hac ur pillauer,
Hac ur furic hac ur spazer,
Ur violancer, ur biniouer,
Ur flutter hac ur bombarder,
A voe koz n'ellent qet e baqa ;
Re a reont o son dre guêr.

Achap a eure an Diaoul arc'hant
Eus a guêr da vont var ar meaz
Hac un usuiller var e valeur ;
En deus-en enfermet en e bres ;
M'en dalc'h eno betec ar maro,
Ma quittas an usulier e vro ;
Allas ! o re garet an arc'hant
Eo bet ét an ty oc'h an traou.